

KIS-365 – Gl.Sz. **signal**

(GE 29 06 89)

A-gostez e lezin istor an termen evit plediñ hepken gant e gemeradurioù arnevez. Daou rumm a c'haller ober eus ar re-mañ hervez ma'z eo ar **S** tra eus mab-den pe tra eus ijinenoù.

A. – Ar **S** tra eus mab-den.

Ar c'hemeradur-mañ 'm eus bet tro da studiañ e meur a lec'h, adalek va zezenn vredvezekniezh *Le Signal, Description phénoménologique*, Paris, 1959, betek KIS-344, La-08, pp. 336-337 (en arroud-mañ ez eus daveoù da bennadoù all war an divoud en *Emsav* ha *Preder*). E berr, e c'haller despizañ ar **S**, an **arhent**, a-gevenep d'an **arouez** : "Ar gouzrec'h o tec'havaelañ un arouez a c'hoarvez ennañ un treug o tifourkañ e maezienn an emouezañ e rezh ur c'heal ; e kemm, ar gouzrec'h o tec'havaelañ un arhent a c'hoarvez ennañ un treug e maezienn ar fiñval e rezh ur real." (KIS-344, id., p. 336.)

B. – Ar **S** tra eus ijinenoù.

Deveret eo ar c'hemeradur B eus ar c'hemeradur A. Mar dilezer ar meizadur a ra eus an arhent un arvez eus realezh mab-den (hag al loened), evit sellout hepken bezañs un treug etre daou zarvoud fizikel, an darvoud derou ez eo ar goulou ruz lec'hiet war lez an hent d'un ampoent resis, hag an darvoud dibenn ez eo ar pouezañ war ar starderez a-berzh blenier ar c'harr en hevelep ampoent, e c'haller ijinañ ur stignad tredanel o c'hoari en degouezh roll ar blenier hag o "treiñ" gwered ar goulou ruz er wezhiadenn pouezañ war ar starderez. E seurt ijinenn erlec'hiet ouzh an den e ve ivez un treug etre an organ anezhi kizidik ouzh ar goulou ruz hag an organ all o keffloc'hañ an droadell. Dre leteñvelañ e reer **signal** e Gl., Sz., Al. eus an darvoud tredanel o treugañ e-barzh an ijinenn adalek an organ ma c'hoari delanvad ar goulou ruz betek an organ o telankañ ar wezhiadenn stardañ.

Ar gudenn oa gouzout hag e heuilhfe ar Br. ar yezhoù all oc'h ober gant **arhent** e degouezh an ijinenoù. An aters kentañ d'ober eo pe natur eo ar c'hemm etre an div ergorenn a ouezoniezh ez eo ar **S** alvezel hag an **arhent** bevedel. An holl studioù renet war realezh an den hag al loen (ha n'eo ket re PAVLOV hepken) a ziskouez e vez ur

vevenn, un derez mann (en amveziadoù eizhañ, pa na lezer ket gant an trec'houllo breidel an dro da c'hoari er beved – da skouer en arnodoù imbourc'hva), ma arc'hwel an nerveg evel un ijinenn. War an devoud-se emañ diazezet diorreadur an emgefren e pep live eus ar bed arnevez. Evit a sell an arhent, n'eus troc'h gouiziadoniel ebet etre arc'hwelerezh an nerveg hag arc'hwelerezh an ijinenoù emgefreak, ha soliet eo al leteñveliezh war un hevelebiezh. Astenn arver an termen *arhent* eus ar beved d'an alvez ne reer ket enta dre ul leterc'hañ met dre un dienderc'hañ (sl. KIS-359, La-09, TA3h, p. 84).

Ur spisadur a rankan da reiñ, o tervaat c'hoazh al lakadenn diaraok. Dre berzh ma'z eo ar goulou ruz un arouez evit an arseller emouiziek, e reer anezhañ un arhent evit ar blenier anemouiziek. Ne c'haller e ober avat nemet o vont dre ul lavar laosk, ledanvadek. Ned eo ket ar blenier anemouiziek evit ergorelaat ar goulou ruz da arhent dre berzh end-eeun ma'z eo an arhent un arvez eus un ersav anemouiziek ; e ergorelaat, emouezañ outañ zo dre ret e ambredañ da arouez. E-se, ne c'haller studiañ an arhent nemet a drede gour, dres evel ma studier an arhent alvezel en ijinenoù.

Deskrivañ a reer enta an arhentoù (alvezel) evel furmoù fizikel didermenet ent kementadel (gremm, h.a.) hag ent doareadel (luniad, h.a.), treugus (en amzer hag en egor, eleze trebadus ha treuzlec'huis) en ur metou azas ; e seurt doare ma c'hellont arc'hwelañ ha mont e kenaoz kenetrezo evel kanteulioù al lavar pe ditouroù an ober. Ken ma'z eo amkan kentañ an ijinenoù heñvelekaat o arhentoù ouzh kanteulioù : an arouez, diwar m'he fizier en ijinenn, a baouezer a rannañ etre kanteul hag arganteul evit he rannañ etre **arhent** ha **stlenn**. Merkomp diouzhtu an diforc'h pennañ etre an arganteul hag ar stlenn ijinenn : argemmus e vez an arganteul da geñver pep arveradenn eus an arouez, sonnet eo dre dermenadur ar stlenn staget ouzh pep arhent alvezel. Kevempleg da se, tra ma vez meret an arouezioù el lavar ken diwar-bouez o zalbennoù arganteulel (er ouezoniezh hag er vuhez pemdez), ken diwar-bouez o zalbennoù kanteulel hag arganteulel en ur ser (er varzhoniezh hag er vuhez pemdez c'hoazh), e ver an ijinenn an unvezioù arhent-stlenn diwar-bouez o zalbenn arhentel nemetken, eleze evel furmoù fizikel hervez saveleñoù ar Fizik. [Sl. GSTL., ¶¶ 2254 hh., ¶¶ 2378 hh.]

Rummañ a c'haller an ijinenoù hervez an doare ma savelont ha ma amkanont an unvezioù arhent-stlenn. Sellomp pep ijinenn evel graet a deir lodenn : 1) an organ o savelañ an unvezioù arhent-stlenn, oc'h **enankañ** ar stlenn ; 2) maezienn an treugoù, eleze ar rouedadoù, h.a. e diabarzh an ijinenn ma vez ar stlenn o **treankañ**, o vezañ danzeet, kadavet e memorioù, h.a. ; 3) an organ oc'h **ec'hankañ** ar stlenn e stumm arouezioù pe wezhiaduroù. E se e tispartier pevar rumm :

I. – An ijinenoù a bourchaser dezho ar stlenn diwar arouezioù, pe **derc'henoù**, hag ouzh e zaskoriñ e stumm **derc'henoù**, pe **ijinennoù keweriañ ar stlenn**.

Er rumm-mañ emañ an ijinenn anvet e Gl. **ordinateur**, e Sz. **computer**, **computer system**, **computer machine**, **information processor**, **information processing system**, dezhi meur a anv e Br. ivez : **urzhiaer**, **kevrñver**, **ijinenn stlenngeriañ**, **reizhiad stlenngeriañ**, h.a.

II. – An ijinenoù oc'h enankañ stlenn diwar **derc'henoù** hag ouzh e ec'hankañ e rezh gwezhiadoù dre werediñ rag-eeun war ar **gwerc'henoù (ijinennoù stlennreet)**.

Er rumm-mañ emañ an ijinenoù arveret er greanterezh, oc'h enankañ ditour un trevell e-ser urzhioù roet dezho diwar ul lurell warellek.

III. – An ijinenoù o savelañ o stlenn rag-eeun diwar an traoù, ar **gwerc'henoù**, hag ouzh e zaskoriñ en ur furm lennadus, e rezh **derc'henoù**.

Amañ e kaver an ardivinkoù lerc'hwezañ, an elektrokardiograf da skouer, kizidik e enankerioù ouzh argemmoù tredanvarr ar c'hroc'hen hag oc'h ec'hankañ tresenoù o terc'hennañ gwerederez ar c'haer kalon.

IV. – An ijinenoù oc'h arc'hwelañ evel re ar rumm III evit an enankañ (rag-eeun diwar ar **gwerc'henoù**, hag evel re ar rumm II evit an ec'hankañ (o werediñ rag-eeun war ar **gwerc'henoù**).

Er rumm-mañ emañ an holl ardivinkoù emgefreak, adalek ar gwrezdalc'her hag ar c'hemmer tizh emgefreak betek ar robotoù hag ar greantioù peuremgefreak. Ar ouezoniezh o plediñ gant seurt gwikefrepoù eo ar **sturoniezh** (Gl. **cybernétique**). Div wikefre diazez an ijinenoù emgefreak eo ar **c'horwered** (Gl. **rétroaction**, Sz. **feed(-)back**) hag ar **vemor** pe **kadav** (Gl. **mémoire**, Sz. **memory**, **storage**).

Enankañ :

Ec'hankañ :

DERC'HENNOÙ Ø I. *Ijinennoù keweriañ ar stlenn* Ø **DERC'HENNOÙ**
DERC'HENNOÙ Ø II. *Ijinennoù stlennreet* Ø **GWERC'HENNOÙ**
GWERC'HENNOÙ Ø III. *Ardivinkoù lerc'hwezañ* Ø **DERC'HENNOÙ**
GWERC'HENNOÙ Ø IV. *Robotoù unanazasaus* Ø **GWERC'HENNOÙ**.

Sioù a vez e treankañ an arhentoù. Da anv hollek dezho e kinnigan Br. **darankad g.-où**. Un darankad o c'hoarvezout gant an arhent e-unan a ran anezhañ un **torgamm g.-où** (Gl. **distorsion**, Sz. **distortion**), a dermener evel displeberidigezh an arhent bep ma'z a gant e dreug. An darankad diwar daremouezh darvoudoù estren d'an arhent a anver, diouzh an dro, **trouz**, **ardrouz**, **vorm** (Gl. **bruit**, **parasite**, **bruit de**

fond ; Sz. **noise, disturbance, interference, nuisance, perturbation, additional noise, background, background noise**) ; dre astenn ster e reer c'hoazh eus an ardrouzoù **arhentoù euverek, anvennet**, a geveneber neuze ouzh an **arhentoù arverek, mennet** (Gl. **signaux parasites – signaux utiles**).

GERVA BREZHONEK-GALLEK HA NOTENNOÙ YEZHOURIEZH

darankad g.-où "parasite". Ar rakger *dar-*, renket e-touez ar rakgerioù kreñv-
aat, zo dezhañ, etre re all, ar c'hemeradurioù : a) "trumm", sk. : *darlusk* ;
b) "feuls", sk. : *daraez* ; c) "dre nerzh", sk. : *darsankañ* ; d) "a-dreuz", sk. :
daraozad (Gl. "artéfact"), kemmesket gant ar furm *tar-*, sk. : *tarlonkañ*. Evit
-ank-, sl. *enankañ* amañ dindan.

ditour g.-où. Eus daou gemeradur an termen ("keloù", "urzh") e kinnigan
derc'hel an eil hepken en domani-mañ. Gl. *instruction*, Sz. *statement*,
instruction.

ec'hankañ "sortie". Stumm kentañ ar ger a gaver e KIS-026, La-03, p. 91 :
ezankañ. E 1969, n'edo ket dedalvezet ar reolenn : **eks* > *ez-* dirak ur
genonenn (nemet *c'h-*, *h-*), *ec'h-* dirak ur vogalenn, *e-* dirak *c'h-*, *h-*. Tidek
eo evit ul lod seurt reolenn yezhouriezh evel an holl reolennoù. Dre vras
n'he arverer ket evit ar furmoù en arver a-gozh, sk. *eskemm*, *eskantet*,
eskorñ, h.a.

enankañ "entrée". Termen kinniget ivez e 1969 gant KIS-026, id., p. 91 : "evit
ur stlennad, mont tre en ur stlennhenter ; lakaat (ur stlennad) da vont tre
er stlennhenter." Diwar ar gedrann *-ank-*, hBr. *a(n)co*, *ecdiecncis* (DGVB.,
pp. 52, 154), Br. *diank*. Merkañ an arver evel verb gwan ha verb tre.

enanker g.-ioù "capteur, sonde, électrode, clavier" hervez an degouezhioù.
Organ o savelañ stlenn e rezh arhentoù en ur stlennijinenn.

gwezhiadenn b.-où, *gwezhiadur* g.-ioù "opération".

keweriañ (ar *stlenn*) "traiter (l'information)". Kv. hBr. *coguer* "probe, honnête,
loyal, vertueux", Kb. *cywair* "well ordered, made ready ; proper order,
preparation", *cyweirio* "to put in order, arrange, prepare ; adjust, adapt".
Diwar ar verb-mañ e c'haller deverañ :

kewerier g.-où, Sz. *processor*, Gl. *processeur*.

korrgewerier, Sz. *microprocessor*, Gl. *microprocesseur*.

stlenngeweriañ, Sz. *data processing*, Gl. *traitement de l'information*,
informatique.

lankañ "commander" [Spisadurioù war an termen a gaver e-barzh GSTL.,
¶ 747.]

lanker g.-ioù "commande". Sl. KIS-200, La-08, p. 6, v° *rezad lankerioù*.

stignad g.-où "dispositif, montage".

stlennijinenn b.-où "machine, ordinateur, machine de traitement de données".

stlennreet aao. "sous commande informatique".

treankañ "cheminer, acheminer".

treug g.-où "chemin (de données)". Hent heuliet en egor hag en amzer gant un arhent e-barzh ur stlennijinenn ; heuliad ar gwezhiadurioù ma tremen drezo ar stlenn eus an organ enankañ d'an organ ec'hankañ.

unanazasaus aa. "auto-adaptatif". A-zivout ur seurtad roboù oc'h ober stad eus argemmadoù ar metou. [Hiroc'h a gaver gant GSTL., ¶ 3735.]